

b
a
r
z
o
n
e
g
o
u

NAIG ROZMOR

KARANTEZ

HA

KARANTEZ

BRUD NEVEZ

naig rozmor

KARANTEZ HA KARANTEZ

barzonegou

brest

brud nevez

1977

KARANTEZ HA KARANTEZ

Personnenn

EUR GOR A RADG

Eur stagadenn eo al leor-mañ da VRUD NEVEZ, n° 4, ebril 1977.

Rener ar gelaouenn : Andreo Merser

Sekretour : Jakez Salaun.

An oll skridou ha lizerou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais
29200 BREST.

Disklêriet hervez al lezenn : eil trimiziad 1977.

C.P.A.P. : 34 627.

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin, le Guilvinec).

C. Naig Rozmor ha Brud Nevez.

EUR GER A-RAOG

Ha taolet hoh-eus bet evez ne vez ket, pe nemeur, komzet euz ar garantez, e brezoneg ? Euz ar garantez etre eur gwaz hag eur vaouez, a fell din lared. Marteze n'eo ket kement bremañ ken, med eun dra da veza kuzet e oa evid ar Vretoned, ha geriou 'zo ne vezent laret nemed a vouez izel. Ne veze ket lavaret, peurvuia, « *en em gared a ra an daou zen yaouank-se* », « *istim* » pe « *joa* » eo o-doa an eil evid egile. Pe neuze, pa veze ar gaoz war an tu-ze, etre gwazed dreist-oll, pe zoken etre gwazed ha merhed, e veze troet da veza kentoh druz ha groz a-walh...

N'eo ket eston neuze ma n'eus ket bet skrivet a-benn ar fin kement-se a varzonegou (na marteze a skridou all) a garantez e brezoneg. Ma zo eun dra hag e-neus souezet Naig Rozmor p'eo en em laket hi da lenn brezoneg, eo se. Ha p'he-deus kroget da vad, n'eus ket pemp vloaz 'zo, da skriva e brezoneg, eo barzonegou a garantez eo he-deus skrivet da genta. Rag dezi e vanke lennegez a garantez en or yez, ha kredet he-deus e vanke ive d'an dud all. Petra d'ober neuze, nemed displega ar pezh a oa en he hreiz, ar pezh a veve, ha respont dre ze d'an ezomm a oa enni da lavared ar garantez.

Rag eviti eo ar garantez ar haerra santimant da zikour an den d'en em houzañv e-unan ha da houzañv ar re all. Heb ar garantez, ne vefe ket bevabl ar vuhez. Hag e-keñver karantez ar galon, ema dioustu karantez ar horv - ha n'eo ket hebken sevel tiegez hag ober bugale eo (ar pezh, daoust ha beza kaer, n'eo ket a-walh), kalz frankoh ha ledannoh eo evid se, eme Naig Rozmor. Hag e lavar : « *ar garantez etre ar houblajou a ro tro dezo d'en em zibrada an eil dre egile, dreist teñvalijenn ar vuhez* ».

Kaoud c'hoant da skriva hag hen ober a zo daou dra disheñvel avad. Ha n'eo ket deuet Naig Rozmor a-benn, euz an taol kenta, da skriva evel he-doa c'hoant diwar-benn ar garantez. Med Leonardez m'eo hi, ha levezonet gand Tagore « *hag a gomz euz ar garantez e-giz eur zakramant* », n'he-deus ket kavet gwelloc'h nemed komz anezi e brezoneg gand anioù a liderez. « *Kaer evel eur bedenn eo ar garantez* », alese ar barzoneg o ano « *alleluia* », « *lid* », « *gousperou* »...

Med eul liderez pagan eo ive ar garantez, hervez Naig Rozmor, ha setu perag barzonegou all anvet « *sabad* » pe « *Mari Vorgan* », hag ar stumm-ze da skriva hag a zo dezi ha ne gaver e skrid brezoneg all ebed. Konta a ra en eun doare gwirion-kenañ « *huanadennou he horv entanet* », n'ankouanac'ha ket evid se n'eo ket ar garantez eur blijadur hebken-pe neuze, evel a lavare din, « *n'eo ket libr an den ken* » - med « *eur gomunion souezuz / deuet d'or skoulma korv hag ene / beteg ar beure.* »

Gand komzou tener - « *ken tener ha bleuniou mae* », a zo bet lavaret dezi - ha kizidig zoken, eo e ra Naig Rozmor pa skriv he barzonegou a garantez. N'eus ket enno, er mod m'int skrivet, hag en amzer hirio dreist-oll, peadra da feuki den ebed, ma oar an den petra eo ar vuhez. Ha koulskoude he-deus bet diegi o rei barzonegou 'zo d'embann. Gwir eo, maouez eo hi, dre heh oll wazied, hag e oar, dre vicher, petra eo lakad eul leor etre daouarn unan bennag, e hell beza eun dour a vuhez pe eur hleze d'e laza. Eun himn a garantez eo leor Naig Rozmor, ma hellan ober va unan gand eur ger a liderez n'he-deus ket hi implijet c'hoaz, a gav din. Ha mond pelloh a ra zoken, pa ziskouez, « *en ano ar garantez* » bepred, « *ar plahig gwerzet d'ar pinvidig* » hag « *ar mevel gwallgaset gand e vestr* »...

Koulskoude, farsal a oar ober ive Naig Rozmor, ha goapaad zoken. Ha skañv e hell beza he 'fluenn da fenti, na pa vefe nemed diwar-goust « *an tousegi mod nevez* » hag o-deus laket meur a hini da c'hoarzin dija...

Gwir eo he-deus Naig Rozmor eur stumm da skriva hag a zo tre diouz doare ar brezoneg. Skriva e galleg he-dije bet gallet ober, hag he-deus bet greet, a-hed he buhez koulz lared. Med pa oa yaouank, eno e oa ar brezoneg yez ar gêr - an hini a veze paket o kaozeal galleg e-neveze eul litrad da bêa ! - hag e brezoneg eo he-deus bet skrivet d'he zud, pa oa er skol e pañsion « *abalamour din da helloud konta penn-da-benn va doare d'am zud, dre ma ne ouie ket ar vestrez a vrezoneg !* ». Gand he zud, gand tud euz heh anaoudegez, he-deus bet atao evel mez o kaozeal galleg.

Pa 'z eo deuet eun nebeud bloaveziou 'zo Visant Seite, heh amezeg, da houlen skozell diganti, n'eo ket bet gouest da lavared nann. Lonket he-deus ar henteliou dre lizer diwar herr. Ha dre m'eo dezi eur blijadur skriva, eo kroget, dre ezomm ive, da zewel kontadennou hag istoriou.

P'he-deus santet e oa barreg da zisplega difazi he santimanchoù donna, eo en em laket da skriva barzonegou.

Setu aze, kontet berr, istor Naig Rozmor, hag istor he barzonegou. Ar barzonegou-ze eo a ra danvez al leor kenta ema Brud Nevez oh embann. An deiz all, e lavare A. Merser er radio eh embanner re a varzonegou brezoneg, ha re nebeud a draou all. Gwir eo marteze. Ral eo avad kaoud an dro da lenn en or yez barzonegou skrivet ken brao ha ken êz, seurt ar re a zo bet skrivet gand ar vaouez m'eo Naig Rozmor. Pe blijet pe displijet e vo al lennerien - ha plijet eo e vo sur mad ar peb muia - souezet e vo an oll. Sed on sur o-devo c'hoant an oll da brena ha da lenn al leor-mañ.

J. SALAUN

Grand paine a re evel
A walh, p'ouez war parhad, a pa' a walh
Ma'n on ket tresp
Da zougne war skort bet
Gwel reouez ar-der, ar-der,
Gwel on fadenn
Lec'hañs beved da zont re beved
Va halow a wa' beved.

Selaou !

Ma vije a-walh
Kemer, o Doue ! va zammig buhez
Evid ma paouezo an droug war an douar...
Med, ne dle ket beza a-walh,
Pa 'z on siwaz ken nebeud a dra !

EN ANO AR GARANTEZ

En ano ar bugel bronduet gand e dud vezo,
En ano ar plahig gwerzet d'ar pinvidig,
En ano ar mevel gwallgaset gand e vestr,
En ano ar hlañvour ha ne ehan ket da vervel,
En ano an den o preja gand eur voestad fourmaj-ki,
En ano ar hi staget ouz eur wezenn da hedal ar maro,
Me a greñjfe ouzit... o va Doue !

VA FEDENN

« On tad pehini zo en neñv »
A-walh, paouez eur pennad, o ya, a-walh !
Me n'on ket krefiv
Da zougen eur seurt beh
Gwel penaoz az-peus va lakeet,
Ganit on flastret.
Lez ahanon bremañ da zehi va daoulagad,
Va halon a zo bruzunet.

« Da ano beza santeleat »
N'em-oa ket goulennet dond er bed,
Perag beza ouzin atao ken kounnaret ?
N'eo ket din hebken evelato
Pêa dle an oll dud
Evid an dismegañs greet d'az ano ?
Respont, perag e chomez mud ?

« Da rouantelez deuet deom »
Me en em houlenñ hag ezomm 'zo
Da hervel ahanout davedom
Pa 'z out ponnergleo.
Gwechall va zad euz an douar
N'eus forz pegen skuiz e vefe,
A zelaoue e vugale p'o-deze glahar
Hag o dizamme.

« Da volontez beza greet »
Evel just. Te eo ar mestr braz,
An Doue parfed,
Euz da varadoz e welez frêz
An henchou zo red deom darempredi
Evid ober on silvidgez, neketa ?
Gra neuze ma houzanvin heb sakrei
Pa blijjo dit va hastiza.

« Evelse bezet greet. »

DAOUARN VA ZAD

An douar a deu e va daoulagad
Pa zoñjan e daouarn va zad !
Daouarn eur houer, rouz ha fraillet
Evel an douar pa vez skarnilet
Gand avel pud an hanternoz

Ledan 'oant evel golvaziou
Digoret gand ar gwall labouriou
Med pa drohent deom or bara,
Evel re ar beleg d'ar gorreou,
Daouarn va zad a skuille grasou.

ENKREZ

Evel ma kouez an deliou,
Hini hag hini,
E ruill va daelou
Karget a anken
En eur zevi
Din va dremm.

Avel hwero
An hanternoz
O dizeho.

Med o roudou garo
A doulo eur 'foz
Dre leh ma redo
Barradou-dour
Ar glahar
O vond da zikour,
En eur goueza
War an douar,
Ar roz da vleunia.

DA BETRA 'ZERVIJ ?

A-wechou, pa vez aveleg an amzer,
Aonuz ar goabrenn,
P'am-bevez riou beteg e va halon,
E teu din lavared :
Da betra 'zervij ?
Ya, da betra 'zervij stourm, poania, kared zoken ?
Warhoaz e vezo fin... ha goude ?
Netra, nemed eur vozad poultrenn,
Dindan eul letonenn
Ha spered dizofij an den
Da drei buan ar bajenn,
Da ankounac'haad !
Setu da betra 'zervij e gwirionez ?
Me en em houlen !

Neuze, a drugarez Doue,
Pa vezan evelse fallgalonet,
E welan atao,
En eur horn pe gorn euz va buhez,
Eur ganevedenn ruz o skedi
Karget a bromesaou a joa.

REQUIEM

Maro ar Vereuri-vraz
Evel ped all tro-war-dro !
Goullo ar porz,
Yen an oaled,
Mud an orolaj.
Trouz ebed ken,
Nemed e serr-noz a-wechou
Etre ar puñs hag an treuzou,
Eur boutou koad didach
O seni glaz !
Boutou ar vamm-goz, er Vereuri chomet,
P'e-noa kuitaet he mab diweza,
E zah gantañ war e skoaz,
'Vid mond war-lerh e vara.

Chomet eo heh-unan
Evel, war ar vag, ar habiten,
Ha ne asant ket tehed
Pa ziroll ar gorventenn...

E-pad m'ema azezet, mantret,
E-keñver ar prenestr,
He daoulagad glaz
A zeblant gweled c'hoaz
Skeudennou eüruz
An amzer dremenet :
Parkajou lin, chatal gallouduz,
Ha bleuniou koton gwenn ar hoefou,
Leiz an henchou.

Siwaz ! Ne hell nemed pedi
He japeled etre he bizied
Rag digor eo an arvest
Ha maro ar Vereuri.

**EVID GOUEL VA MAMM,
DOUE D'HE FARDONO**

Mammig, hirio edo da houel
Nag e vijes bet laouen
Dindan da vleo gwenn
Direket gand an avel.

Med va huitaet az-poa,
E-kreiz an hafiv tremenet.
Da zevez oa echuet,
Et out da ziskuiza.

Me glev da vouez en noz
O kentelia 'hanon
Hag o skuilla warnon
Komzou leun a vennoz.

El liorz ema da roudou,
Da gador a zo goullou,
Ha, dre an ti, an hekleo
'Zoug atao trouz da voutou.

Kutuillet em-eus roz,
O digaset dit, mamm,
Evid tomma eun tamm
Mein sklaset ar beziou.
Ro din aluzenn eur zell
Euz palez da varadoz
Ha gwel va dornad roz
Rag hirio ema da houel.

AR MESAER

War hent ar Baradoz
Me am-eus gwelet,
E-touez e zefived,
Ar pastor koz.

Speg ouz ar menez,
Tostig d'an Neñvou,
E-kreiz an neziou,
'Tremen e hafvez.

Eur boned rouz
Da zisheolia,
Ha da ziskuiza
Eul lochenn blouz.

D'an abardaez
Eun delienn vara,
Evid he souba
Eur berad lêz.

Hag eur bomm-kan
A galon vad
Da luskellad
An oan bihan.

Eüruz bepred
E zellou laouen
A zo sklêrijenn
A-zioh ar bed.

Eno, aliez,
Dre vannou skeduz
Ar stered ruz
'Tiskenn an êlez.

Tefñzor a furnez,
Diwar an uhel,
Ro din eur gentel
Da ren va buhez.

PEDENN HOUEZ

Aotrou korrigan !
Va 'flanedenn a zo garo.
Emberr me a deui
Da lanneg Beg-ar-Roz
Ha d'az kedo,
E gwask an trede peulvan,
Rag êt on nehet maro.

Pa zono hanternoz,
Din, te a zesko
Penaos ober ma vezo bravoh warhoaz
Eged hirio,
Penaos lakad ar spern da vleunia
Hag an enkreuz da gila,
Penaos beva heb gouela ?

Ha m'hen lavarez din,
Ganez, beteg ar mintin,
Me a gano,
Me a zafiso
Ken e brallo ganeom ar peulvan koz
War lanneg Beg-ar-Roz.

DA VA HENDALHER

N'o-deus ket goulennet
Dond war an douar
Ha koulskoude emaint aze,
Ken karantezuz,
Va zri 'fenn tortiz !
Gand o levezuz,
O hudennou,
Hag o yaouankiz.

Ha me a drid
O weled va gwad
Deuet da veza tud !

KALANNA AR MABIG JEZUZ

**Eur gontadenn Nedeleg, tri mil goz,
dastumet ganin e bro-Brovañs.**

War henchou ar Menez Ventoux,
Kignet gand ar mistral pud,
Tri Voemian, karget a banerou
A gerz da glask dezo gwerz.

A beb tu, an noz du
Dreist ar vro vud
A zispleg he mantell toullet a stered
Hag ar vein ruill
A zo ken puill
Dindan o zreid
Ma kouezont a-wechou
O tiskenn d'ar Menez Ventoux.

En aner e klaskont eur houdorenn da ehana,
Da zizamma,
Na pebez kudenn !
War ar menez kraz ha noaz
N'eus nemed ar mistral o yudal d'ar bleiz...

Souden, a-bell, war an tu kleiz,
Eur houlaouenn a gemenn dezo
Ez eus buhez war he zro...

Deom di, emezo,
Gwelet e vezo...

Hag an tri Voemian, en eur zastum o zruillou,
A vale adarre daved ar goulou.

War dor ar japelig zistro, pa errujont,
Unan a sko.
Den ne respont.

Ahanta ! Digor, eme ar hosa,
Na jom ket aze da grena.

O ! En em estlammont asamblez,
Eur hraouig e-touez an êlez !
Gand eur bugelig war barlenn e vamm !
Hag eun den koz e benn dizolo !
Hag eun ejenn o tebri kolo !

Ha pastored o pedi e-kefiver o defived !
Na pebez dudi !
Na pebez sklêrijenn !
Peoh 'ta ? Me a glev kana...
Gloria in excelsis Deo...

Mad eo, chomom amañ da hedal an deiz
Plas a zo
Ha na kaerra lojeiz !
Zoken tostaom outo.
Marteze ez eus arhant ganto...

Ha neuze, mabig koant !
N'az-peus ket a hoant
E tisklêrjem dit da amzer-da-zond ?
Ro da zornig
N'az-peuz ket aon
Evid eur gwennegig, Janan a lavaro dit
Ar peuz a zell ouzit.
Soñj, abaoe deh, n'on-eus debret tamm !
Perag e c'hoarzez ?
Ro pevar reâl, ma karez,
Ma fell dit kleved penn-da-benn
Da blanedenn...
Skrija a rez ?
Riou az-peus marteze ?
Pe diêz e kavez
Kleved dija ar wirionez ?

Siwaz ! Gwelet am-eus
Ha kompren a ran dioustu da anken
Digarez ahanon
O bugelig baradoz.
Ha te, den koz, diskrog pelloh diouz da azenn
Kredi a rees neketa
E laerfem anezañ diganez ?
E laerez, evel an dud difeiz ?
Pa ouzom bremañ piou eo ar bihannig aze en ho kreiz
Deom kentoh d'an daoulin
Setu dirazom an Doue ganet en eur hraou !

Ha peogwir eo re baour da brena diganeom panerou
Kinnigom dezafñ d'e galanna
An hini vrava
Ha stouom dirag an Doue noaz...

Va haezig, me a wel dreist da vousec'hoarz
Eur mañjouer evid kavell
Hag eur groaz evid mervel.
Pardon ofañsou tri Voemian du gand an naon
Ro digemer dezo en da galon
Ha gra ma vezo hiviziken
Laouennoh o 'flanedenn.
Evelse bezet greet.

VA HI

Tregont lur karantez, douster ha pasianted
En eur zah bleveg
(Dre jañs, eur zah du skoulmet e gwenn !)
Sellou tener da ranna deoh ho kalon,
Muioh a skiant eged tud 'zo
Ha marvaillou forz pegement !
Gand e lost,
Gand e bao,
Gand e fri,
Deus amañ Faro !
Setu va hi.

TRUEZ

Re dener va daoulagad
Da zelled ouz fuzuliou
Re dener va diskouarn
Da gleved trouz an tennou,
Re dener va halon
Da houzañv klemmou...
Kalz re dener e gwirionez !

O na kriz eo beva, da boent ar chase
Pa vezer ken tener ha me !

Chaseour ! Digarez ahanon
Me, me garfe e vefe
Lijeroh c'hoaz ar gedon,
Finnoh c'hoaz al lern
Ha... goullou da vuzetenn !

Amen

HUANADENN

Jezuz, e va halon ez-poa hadet
Din e karg da boania
D'he lakad da vleunia,
Greunenn an eurusted.

Abaoe, bemdeiz, dalhmad,
Pe ve fall, pe ve brao,
Eo bet douret gand glao
C'hwero va daoulagad.

Va greunenn ne ziwann ket
Petra 'z eo red ober, Jezuz,
Lavar din, da veza eüruz ?
O hedal me zo nehet !

Jezuz, goustadig a respontas :
- Pa baouezi da huanadi
E weli da hreunenn o tarevi,
Da zaelou n'int nemed dour, allaz !

Biken ne vleunio en dristidigez,
Tommdar ive a vank dezi,
C'hoarz bremañ d'he heoli
Hag e kavi al levenez.

WAR AR GLIZ

Deuet on d'az kerhed !
Dre roud an avel,
Ar hloh 'm-eus klevet.

Setu an deiz,
O va zurzunell !
D'ober da neiz.

Deus war ar gliz
En da dreid noaz
Dirag an iliz,

Ha lavar din,
Eur wech all c'hoaz
Er sklêrder vintin :

Evid pried,
N'az-peus tamm keuz
D'am beza choazet ?

Nag o tilezel
Da wele beuz
Evid va hazell ?

Ma kavez diêz
Emaout abred
O va rouanez,

Da nah ar ger
Az-poa din roet
War ribl ar stêr.

Med, mar dout laouen,
Ro din da zornig,
Reseo da walenn,

Ha me da gaso
Neuze goustadig
Beteg eur vro,

A-hont war an uhel,
E-leh ma savi
'Vel eur vogidell,

Eun êzenn wenn,
Ha ma vezi
Va oll sklêrijenn.

C'hoarzin a rez !
Me wel eur flamm
Leun a garantez

En da zaoulagad
O tarza splann
Evel eun tantad.

Gwisk da zae lien,
Bleuniou orañjez
War da vleo melen,

Ha gra eur zell
Heb tristidigez
Ouz ti da gavell.

Dizale an eured
A en em gavo.
Klev al laboused

Bremañ 'zo savet
A-dro-war-dro.
Deuet on d'az kerhed

PINIENN

Selaou !
Ne glevez ket dreist enez Tristan
Eur hloh o seni kafiv ?
Ne glevez ket eur vouez
O hirvoudi en avel ?
O, me heh anavez !
Dahud eo oh ober he 'finijenn.

Sell outi, a-hont !
War groa Trezmalaouenn,
O lakad da wenna lifiser heh eured...
Al lifiser ha ne vo morse saotret !

Gwel anezi bremañ !
Daoubleget war reier Treboul-goz,
O starda, war he halon,
He divreh goullo,
En eur ober an neuz da luskad
Dindan he bleo melen,
Ar bugel ha n'he-dezo ken !

Hag he daelou,
Heb ehan, a gouez da heul ar glaz
Beteg ma teuz va hufivre er vrumenn
A ziskenn goustadig
Da zebelia Kêr-Iz.

WAR HENT BETHLEEM

Goularz eo da liou Myriam
Ha glaou da zaoulagad a zev heb ehan.
Gand da vleo duoh eged askell ar vran
O nijal war da zae lien gwenn-kann,

Te, merh vihan Abraham, a zo eur berlezenn,
Eur brifsez ken koant hag ar steredenn
A deuio da skuilla sklêrijenn
War hent hir kraouig Bethleem.

E disheol an teltennou tefival,
En avel ar goueleh o soural,
Bandennou diniver ar chatal
Reiz, a ziskuiz, da hedat

Ma valeo tud da lignez adarre,
En o zreid noaz,
Dre zioulder an treaz
Da zigas deom eun Doue.

NEDELEG ER VEREURI

Goude beza selaouet
Estlammet
E vignon o konta
Penaos er hêriou
E tremen Goueliou
Nedeleg,
Meriadeg
Paotrig ar Vereuri
A grogas, d'e dro,
Da zisplega
Giz e vro
Da Dangi.

Du-mañ, emezañ, Nedeleg,
A vez bevet
Gand ar mevel, gand ar gazeg
On haso d'ar pellgent
Hag ar stered alaouret
A vez kutuillet en neñvou.
N'on-eus ket a strêjou
Karget a houlou
Nag a staliou
Leun a vadigou...
Er hraou ema an ejenn,
An azenn a zo beo
Hag an erh a zo yen
Pa gouez evel poultrenn
War sapr ar hoajou.
Mamm-goz a raio krampouez
Ha kouignou rouantelez

Evid debri da azkoan,
Da heul ar christr bero,
Bodet endro d'an tan.
Rag kev Nedeleg en oaled
'Doug an noz a zevo
Da domma ar halonou
Hag ar paour a dremeno

En eur gana kantikou.
Ouspenn, e vezo roet
D'ar vugale sentuz,
Eun aval-orafjez
Ha, war baper dantelez,
Eur mabig Jezuz
Dousoh eged ar mel
Sunet
Gand resped
D'e ano santel.

Goude, tintin Mon
A gonto istoriou
A-wechou skrijuz,
Aliez farsuz,
Atao eston
War he muzellou.
Tad koz
Ne loh ken euz e wele kloz,
Med harpet war e ilin
On lakaio da hoarzin
Hag on bennigo
Peb hini d'e dro.

Deus, ma karez,
Ma ne gavez ket diêz
Dilezel da festou braz.
Em zi e kavi plas
Ha digemer vad atao.

Neuze, dit me a zesko
Rosta, dindan ar glaou,
Kistin kement ha viou
Da hedal mond en noz
Henchet gand al letern,
A lammo 'vel eur helern,
Dre waremm Lann-ar-Roz.
Ha ni a gano : Nouel
Ken e tregerno chapel
Itron Varia 'dervenn.
Hag a voueto al loened
En distro 'z an overenn
Rag mankoude a ve pehed.

O, na me a garfe
Mond du-ze !
On Nedeleg deom-ni
Kaer hen dezo,
Biken ne dalvezo
Hini ar Vereuri.
Emichañs Tad va lezo !...

E lezel a reas
Hag en nozvez-se eo
Ar Ruzig a halas
Euz eur braoig
Anvet : Penn-duig
A jomo, daoust dezañ kosâd
Tenera eñvor ar hêrad.

PIOU EO ?

Va halon a zo heñvel
Ouz eun iliz-veur
E-leh ma vezer o pedi,
O klemm,
Hag a-wechou... o rei !

He mouez a zo lent,
Med he daoulagad
A zougo muioh a stered
Eged noz Nedeleg,
Gand ma welo
Eurusted war he zro.

Kared a ra an oll
Hag an oll a gar
... Va hoar

Faint, illegible text on the left page, possibly bleed-through from the reverse side.

30 ERBENK

Lid

Mar plij,
Heb pilpouerez !

30

SKLERIJENN

Kenta tro m'am-oa da welet,
Em-oa komprenet fraez edo dirazon va mestr.

Va zellou a jomas, souden, speg ouz da zellou
Ha va muzellou dilavar.

Da vouez luskelluz am mezve
Ha buhez lirzin da zaouarn
A ree din tañva eun eured a joa.

Va gwazied c'hwezet
Ne hellent ket charread stêr trouzuz va gwad,
Na va halon gouzafiv e zalmou birvidig.

Me, ken otuz,
Am-bije d'an ampoent daoulinet e-harz da dreid
Hag azpedet ahanout
Da zond da lida ganin, eun overenn iskiz !

NEHAMANT

Ha lenn a ouezi en va daoulagad
Pa vleugnint evidout evel al lin d'ar hreisteiz ?

Ha kleved a ri morzol va halon o skei
Da houlenn digor, war dor da galon ?

Hag entent a ri yez va zailler dirazout o rodal ?
Hag huanadennou va horv entanet,
Pell 'zo o leski ouz da hedal ?

O ya, va muia-karet, fiziañs am-eus
Rag me 'wel e tu ar huz-heol,
Steredenn ruz ar garantez
Pignet dija da ren an noz.

VA HAERRA HUNVRE

E donder va huñvre
Ez eus eun ti bihan gwenn o pedi,
Puchet e-tal an aot,
Dindan soul koz e doenn
Kurunet a vorvrini.

E donder va huñvre
E chom blaz onest ar zoubenn
O trempa bara zegal
Blaz ar hraoñ, blaz ar fao
Ha blaz ar histin poaz.

E donder va huñvre
Ema c'hwez ar bezin kraz,
Nijet diwar eur holhed,
Ha c'hwez pud ar maged
Evel hini ar horvou o tevi daou-ha-daou.

E donder va huñvre
Emaon noaz,
Dindan moue va bleo dispak,
O tafsal evidout da heul tan an oaled
Ha telenn vraz ar mor o seni ouz an tevenn.

E donder va huñvre
Ema da zaoulagad,
Ha da zivreh digor, ha da galon ive
Hag eur gwele kloz, fichet gand dantelez,
Da lida or harantez.

PA DREMEN AN ASKELL-GROHENN

Setu, o va fried, sonet eur breüz ar garantez
Klevet am-eus an askell-grohenn o regi gouel seiz an noz
Hag ar gaouenn, a-bell, o huchal dezi.

Gwel bremañ, e skleur ar werelaouen,
Telenn ardant va horv dit kinniget
Gand heh oll gerdin stign.

Stou eur pennad dirazi
A-raog tañva douster he zoniou
Hag he 'floura gand doujafis.

Ev goustadig he mousc'hoarz enkrezet,
Selaou he 'fedenn,
Ouel ganti ma klemm,
Reiz anezi ma yud,
Trid d'he heul pa greno etre da zaouarn
Ha nij war heh askellig skañv
Uheloh eged ar bolzou uhella...

Rag ema erruet mare ar gomunion zouezuz
Deuet d'or skoulma korv hag ene
Beteg ar beure.

ALLELUIA

Ped gwech e vezim bet, on-daou, o paska
E donder ar gwele pluñv ?
Ped tantad o-devezo maget ennañ or harantez ?
Ped nozvez or-bezo devet evelse,
Ped chadenn torret asamblez ?
Ped alleluia az-pezo tennet euz va horv digabestret ?

C'hwiled an oaled hebken a hellfe va respont
Rag int eo diwallerien an tan.

PROMESAOU

E meleour da zaoulagad
Me 'wel laboused glaz
O nijal daou-ha-daou war-zu ar memez neiz
Ha goulou mil steredenn
O tañsal en-dro dezo.

E meleour da zaoulagad
Me 'wel inizi hwez, karget a c'hwez vad
O vousec'hoarzin d'or c'hoanchou kenta
Hag eur vagig wenn o kerzed daveto
Gand he lien dispak
Evel goul eur wreg nevez
O vired dezi c'hoaz
He glander war he zremenvan.

E meleour da zaoulagad
Me 'wel tantad ardant on divreh chadennet
O tevi asamblez.

GOUSPEROU

Pa vez bet re bonner va devez,
Pa deu an avel-vor da dourta dizamant va dor,
Pa vezan skuiz o stourm ouz va flanedenn,
Me halv douster da zivreh nerzuz
Da va dastum kloz enno.

Etrezom, ne vez ket ezomm a gomzou,
Eur zell hebken, pe eur voustradenn hirrohig
Euz da zorn war va dorn,
A ra d'eur baradoz skeduz, digeryevidom on-daou
Rag va halon war da galon
A vez atao treh d'an deñvalijenn.

Neuze, o burzud !
Ar bed a baouez da drei,
An orolaj da zeni,
Al laboused a dav
Hag ar gorventenn a stou e toull an nor
Evid selaou salmou eur gousperou a garantez.

MA HELLFEN-ME SKRIVA

Ma hellfen-me skriva pa vezez ouz va hared,
Me a zisplegfe bolzou perlezennet,
Moriou luskelluz,
Touriou-tan birvidig ha feuteuniou kuzet...
Ma hellfen-me skriva pa vezez ouz va hared !

Ma hellfen-me skriva pa vezez ouz va hared,
Me ganfe salmou iskiz,
Hirvoudou terziennet,
Avel diroll ha youhadennou bleiz...
Ma hellfen-me skriva pa vezez ouz va hared !

Ma hellfen-me skriva pa vezez ouz va hared,
Me a zisklêrje moustradennou gouez,
Izlonkou foranet,
Gouliou ruz hag enkreuz aliez...
Ma hellfen-me skriva pas vezez ouz va hared !

Ma hellfen-me skriva pa vezez ouz va hared,
Me a lavarfe levez ar bed
Dindan pokou bero an heol
Ha skrijadenn-veur an douar
O reseo he douriou kenta...
Med ne hellan ket skriva pa vezez ouz va hared !

KREGIN

Ha dafñsal a rin c'hoaz,
En noaz,
Evidout war an traez,
Evel an inkane gouez
Tehet euz da hufvireou ?

Nann, kelernig koant,
Paouez bremañ ma tigorin
Kregin da zivesker kloz,
Evid selaou enno ar mor o trouzal
Ha suna o 'frouezenn dener,
Ganti blaz
Ar bezin glaz.

Dit on, o va mestr,
Digor, digor buan
An istrenn perlezennet
Pell 'zo o helver da bokou.

BALE EURED EVID DOUE AR MOR

Pa ziredas euz ar hornog
Neptun war e garroñs eonenn,
Amfitrita, er wagenn,
A ziskennas gand joa.

Pa zevas dezi he muzellou
Gand holen e bokou kenta,
E klozas, war he 'fried,
Mantell hir he bleo dispak.

Ha pa stardas warni
Tarziou nerzuz e zivreh
E voanas, en eur skrija,
Gwialenn he horv noaz.

Med pa glaskas dibrenna war he glander
E krenas an oll aochou tro-war-dro
Gand stroñs ograou ar mor
O c'hoari evito e laouenna bale-eured.

MARI VORGAN

Me eo Mari Vorgan
Merh ar mor hag an tan.

Ha dond a ri ganin da zabati
Euz a wagenn da wagenn
En eur 'foll vezventi ?

Selaou va hanaouenn,
Karget a bromesaou,
O luskad da esperafis
Ha gwel va divreh flour
Prest d'az sebelia
E donna izlonkou ar blijadur.

Med diwall va mignon
Dindan glander va zellou
Eo kuzet oll ziaoulou
Ar bedou bet krouet
Ha dindan douster va hrohenn
Ema tan-gwall an ivern
Ouz da hedal !

Diwall va mignon
Rag pokou Mari Vorgan
A blanto o skilfou
Da viken en da galon.

SALOKRAS

Klevet 'm-eus lavared
Feuteuniou Mitilena
A zalh, en o melezouriou,
Skeudennou koant,
Skoulmet diou-ha-diou,
O c'hoarzin dindan o bleo du
Gand bruchedou lorhuz o hoapaad
Ar bôtred ouz o hoantaad.

Na glaskit morse tapoud anezo
Rag tehed a rafent, diou-ha-diou,
En eur hoarzin dindan o bleo
Ha ne jomfe en ho taouarn mantret
Nemed dour o rodella
War feuteuniou Mitilena.

SABAD

War pallenn glaz an noz
Al loar wenn a dremen.
Loar goant
Speg da druillou
Ouz brankou ar gwez
Ha deus, en noaz,
Da zañsal ganeom
War leurenn ar zabad.

Deus da neui en izlonkou
Or horvou benniget
Ha skoulm da vannou
Ouz on divreh digor,
Beteg ma skrijo ar bed
Gand stroñs ol levez.

ER WAGENN

Gourvezet war an aot
E santan dindan va hroazlez,
An trêz tomm, evel da zaouarn,
Ouz va dibrada
Hag an heol warnon o poueza
Eo da gorr dirollet
O klask digor, beteg va halon,
E va horv dinerzet.

Ha daoust hag ar bezin gludeg,
Etre va bizied,
Ne vefe ket ive ar vuhez o tireded
Da skigna ar vuhez ?
Hag an tarz ouz ar roh,
Ar hloh o seni bole on eured ?

Selaou ! Tostaad a ra ar gourlenn
Renevezom ar skoulm
Er wagenn erru d'ol luskellad,
Ha teuz ennon pa deuio al lano.

HUNVRE

Huñvre ! Bre va hun
Bre an abardaez !
Bre ar garantez ouz he heulia
Evid or skoulma, daou-ha-daou,
En he bannou ruz
Pa guz an heol !

Huñvre madelezuz !
Euz a beh e teuez ?
Ha da be bro or hasez
War da askell lugernuz
D'or parea diouz an droug-beva ?

Huñvre ! Douster va nozveziou !
N'am dilez mui
Dirazout me a stou.
Deus emberr adarre d'am 'frealzi
Rag an hent a zo hir c'hoaz
Ha va nerz a vihanna.

DIWAR AN UHEL

Eun deiz, heb soñjal, va mignon,
Eh errui war gribenn uhella da vuhez
Ha marteze e vezò gwasket da galon
O weled an hent, ganez, dija goloet
Hag an diskenn, dillo spontuz dirazout !

Neuze, va mignon, ro din da zorn,
Ma rin dit, eno,
Tañva eur zerr-noz dudiuz.

Diwar an uhel e halvin
Huñvreou koanta da goanta nozveziou,
'Peleh emaint
Da ebeulez 'friantell, da vouchig yell ?
Me o galvo evid eun ebat diweza.

Med pok din ha pok din c'hoaz
Ma varvin ive etre da zivreh,
Heb hen zoñjal, va mignon,
Euz re a garantez
Ha ma yeom assemblez
Da beurleski
War riblou ruz ar huz-heol.

ROGASIONOU

Blein ahanon
Nozveziou a-bez
Daved inizi ar garantez.

Torr ar chadenn
Ouz va sturia
E-touez an dud seven.

Rent din
Frankiz houez
Ar henta femeulenn.

Mez hag advez va horv
Ma resevo diboan
Yenn da hini

Ha lid ennañ
En eur veulgan d'ar vuhez
Aberz ar garantez.

BRIADELEZ 2000

Deuet int endro, da heul an amzer vrao,
Marhegerien divoutou,
Pa n'o-deus na ti nag oz
Nemed an hent a leve,
Nemed ar bed divuzul
Da zigemer o harantez divuzul.

N'eus ket a fuzuillou ganto war o skoaz,
Poent eo paouez laza !
N'eus ket a aour en o godellou
Poent eo paouez bernia !

Hirio, dorn ha dorn.
Dastumet en o zruillou,
E kerzont.
Med warhoaz
Bleuniou ar werhez a gelho he zal,
Pa zimezo dezi war ar prad
Ha kleier ar brulu a zono bole evito
Hag an heol a ziredo ouz daoulamm e vannou
Da skuilla warno e vennoz koulskoude
En eun emgleo a zouster.

EUR MISTER JOAIUZ

Euz peleh 'ta teu ar c'hoant iskiz
A darz em hreiz
Pa harpez war va zellou da zellou ?

Euz peleh e teu ar skrij
A red dindan va hrohenn
Da heul da vizied ouz va floura ?
Hag ar gliz, dre guz, ouz va ferlezenna ?

Petra 'm laka klañv ha terziennet souden ?
Petra 'ra da hinkinou va divorzed tridal ?
Petra 'ra din alteri etre da zaouarn ?
Ha skei war va 'fenn
Hag en em rei, o pegement !
Hag en em renta d'az faltazi ?

Med, perag klask kompren ?
Evel ma tiskenn an heol er mor digor
Da hada eun deiz nevez,
Deus da honid ganin eun eost a joa.

KALANDER

Genver

Bloavez mad a hetan deoh
Levezet leiz ho kalon.
Yehed leiz ho ti.
Arhant leiz ho kodellou
Ha nebeud a... daillou !

C'hwevrer

An eonenn, war ar stêr.
A zaoulamm
Evel eun inkane gwenn
O kas eur helou laouen.

Evid doare eo digor
Lagad ar bleuniou.
War gribenn ar menez.
Hag an heizez, e tommder.
A halv, noz ha deiz.
Euz donder ar hoajou.

Meurz

Avel foll
Troñser lostennou
Jubenner ar plahed paour
Ahanta ! Gra da labour.

Ebrel

Koukoug ! Koukoug !
Piou e-neus lavaret
N'oa ket brao d'ar baotred
C'hoari koukoug
Gand ar merhed ?

Mae

Lêz mae a ruill puill
Euz bronnou digor an douar.
An oanig a zen e vamm
En eur dourtal
Hag ar bugel a zach ar vuhez
Leiz e henou
Hervez lezenn goz ar garantez.

Even

Setu erruet gouel Yann.
Ember, dorn-ha-dorn.
Ni a yelo on daou
Da dana on huñvreou
Ouz kev braz an tantad
Ha d'en em ouestla
An eil d'egile,
Dre aberz an tan.

Gouere

Eur wazig o hlaourenna
'N eur dreuzi traoñ ar prad,
Falz al loar er vann
Prest da eosti ar stered
Ha parkajou kerh o wana,
Dindan pokou an avel,
Evel korvou merhed yaouank.

Eost

Gourvezet war al leur
An eostou gwenn
A glemm
Dindan skourjez ar freillou,
O lakad er bed
Or bara pemdezieg

Gwengolo

Va miz !
Ya, ganet on
E miz ar holo gwenn
Ouz skleur ar loar charreaterez
War he zremenvan.

Here

An heol,
Oh ober d'an avalou al lez,
A laka o jodou
Da ruzia gand ar vez
Hag e halvont, dre guz,
Ar voustradenn
A raio dezo lezel da ruilla
O douster.

Du

Lezom braz-amzer ha luhead
Da lida ganeom
Ofis ar garantez
'Doug an noz
E donder or gwele kloz.

Kerzu

Peoh bremañ
Na zihunom ket
Bugel Nedeleg.

LID

Evel ma en em ro an aot
Dindan salmou ar reverzi
E soubl va glander
Dindan kanaouenn da vizied mibin
O klask, izelloh eged va huanadennou,
Hent souezuz « Bro ar Yaouankiz ».

Evel ma red an eonenn
A-hed ar gourlenn
E tarz skrijadenn ar vuhez
E va gwazied frank-digor
Evid reseo burzud da ofrañs.

Daoust hag e vezin evidout
Ar sklavourez chadennet
Ouz da faltazi ?
Pe drouizez-veur eun aberz nevez ?

Faint, illegible text on the left page, possibly bleed-through from the reverse side.

Faint, illegible text on the right page, possibly bleed-through from the reverse side.

Trid

Muioh eged debri
C'hoarzin a zo red...
Med sikanad n'eo ket !

AR « PLAN ORSEC » E ROSKO

Er zizun dremenet e Rosko
Oa darbet lakad war-zao
Ar « plan Orsec » ! Netra nebeutoh
Evid klask tapoud kentoh
Jakig ar peroked
Tehet euz e gaoued.

Jakig eo labous Piter Johny
A zo o terhel ostaleri
War hent Kastell-Paol,
Eul labous glaz-kaol,
Savet ha flouret gand Piter
E-neus eur galon ken tener
Ma kont eur bern mignonned
E peb korn euz ar bed.

Evelse ar peroked e kaoz
A zo deuet dezafñ a Vro-Zaoz
Da ober laouenidigez
E bratikou hag e diegez.
Jakig a anavez kement hini
A zarempred an ti,
Hag a gomz evel eun den
Pa vez lakeet en e benn :
« Salut Chob », a lavar d'ar pesketaer
Oh eva e vanne dre laer,
En aon da veza sikanet
Gand e itron Chaned.

Pa dremen Marsel war e otokarr
E hell diskenn pa gar
Evid rei kakahuët
Da Jakig inouët,
Pe da youhal e kendalho
Beteg ma teuio endro.

Ha pa erru, diouz ar mintin,
Ivonn en he hegin,
Nag e reseo bemdeiz
Komzou a garantez
« Ivonn a zo kokoig,
O ya, kokokoig da Jakig. »

Piou a jomfe dizeblant
Dirag eur seurt intentamant ?
Setu an ostizez dezafñ a ro
Dioustu eur pez friko.
Kared a ra tud an ti
Med dreist-oll Piter Johny.
War e skoaz e vez aliez gantañ,
Seder, o varvaillad outañ,
Ha beb an amzer o pokad
D'e vestr o labourad.

Red eo e gleved o houlen
Eur banne gwin gwenn !
A gav kenkoulz, ma zudou keiz,
Ma vije mezo noz-deiz
Anez ma taol evez Piter
Pa ziskarg muskadig er gwer.
Med an deiz all, siwaz !
Setu petra 'erruas :

Tra ma edo e vab er gêr
Piter a zilezas e davanicher
Evid mond da zikour e bried
Da zastum patatez, me 'gred.
Jakig, mond d'e heul a glaskas
Hag en em gollas !...

Kerkent e redas ar vrud
A lakaas strafuillet an dud :
- « Tehet eo Jakig
Al labous koantig
A lake kement a levenez
E-touez e anaoudegez... »

Hag an oll d'e glask diwar-herr.
Ne veze gwelet nemed friou en êr !
E berhenn, avad, a yeas nehet
E-pad an tri devez ma chomas kollet.
Soñjit 'ta e veze galvet aliez
D'ar memez poent, euz kalz a diez !
« Alo Piter, amañ 'ma da beroked
Deus 'ta buan d'e gerhed... »
Hag eñ d'ar red,
Gand e gaoued
Da glask er Run, an teher,
A veze dija en Aber...
E porz ar glaouer oa gwelet, evid doare,
Oh en em ganna, ar pez ma helle,
Ouz eun neiziad mouilhi
O sutal eno dizoursi.

A-benn an noz,
En iliz koz,
Oa bet ive Jakig
Oh ober eun droig.
An aotrou Person
Oa gand e zarmon :
« Kalz a vezo galvet
Ha nebeud a vezo salvet ! »
A lavare d'ar beherien
O konta sioulig o gwenneien
Evid dezo lakaad,
An hini bihanna er plad
Pa deufe Saig ar « Beudo »
(Doue d'e bardono bremañ)
Da gestal diganto !

Pa welas kemend all
A skwer fall
Ar peroked a nijas diwar o zro
A-raog ma vije kollet ganto.

En eur dremen
A-zioh ar gouent
Eh ehanas
Er gwez braz.
Skuiz e oa
Na petra 'ta !

Gand an amezeien, kerhet adarre,
Piter, goustadig, outañ a gomze :
« Deus ta, Jakig,
Va labousig
Deus d'ar gêr
Hag az-pezo emberr
Eur banne gwin gwenn. »
- « O ya », a responte laouen.
« Ale, deus va bihan »
- « O ya », emezañ...

O ya ! med ne ziskenne ket...

Ha Piter e galon rannet
A rankas distrei
E-unan d'an ostaleri.

D'e heul, Roskoiz, glaharet,
A zofije gervel ar CRSed...

Mad, c'hwez friko tintin Louizig
Eo a deuas a-benn euz Jakig.
Dre ar prenestr digor ez eas en ti
E leh ma oa touristed o tebri.
Ar re-mañ kerkent
A daolas eur pallenn
War ar peroked
Tri mil spontet !
Hag en eur baner
Da di Piter...

Daou zvez penn-da-benn
E chomas kousket diwar e dehadenn !
Feiz ! Da veaji ne oa ket boazet
Pa veve en eur gaoued.

Yah eo adarre an abostol
Evid brasa joa an oll.
Kit 'ta d'e weled, kenta tro
Ma teuoh da Rosko...
Piter e-unan a vezo laouen
O konta deoh an abadenn,
Ha gwin gwenn e ostaleri
Sur ho lakaio da zistrei...

DIWAR GOUST AR PETROL

Eur c'hwil anvet Lan
Hag ar c'hwilez Marijan
A erruas asamblez
Eun abardaevez
E beg eur bod raden,
Hag int o-daou
Da zivizoud, eun abadenn,
A beb seurt traou :
Euz an amzer ha n'oa ket brao,
Euz ar zehor, euz ar glao,
Euz kernez ar vuez,
Ar bed kaillaret,
Forbaned ar hirri-nij,
Med dreist-oll
Euz kudenn ar petrol,
A roe d'ar c'hwilez nehamañchou
Stag ma oa ouz he êzamañchou.
« Fall 'z a an traou, emezi !
Petra ' rin
Er goañv-mañ,
Lavar din,
Evid en em domma ?
Me ken rividig all !
Ha piou tamall ?
Koll a rin va 'fenn
Ha va empenn !
Evel mamm
On kroget d'ober stamm
Med ne vezo ket a-walh ! »
Ar c'hwil a respontas d'ar plah :
« Marijan
Rez ket van,
Kalon Lan
'Zo tomm-bero !
Deus 'ta du-mañ :

Me da dommo
Ha ne zanti
Ket goañvi. »
Ar pezh a raio
Rag Lan 'zo paotr faro.
Setu ne jom ganeom, tudou !
Nemed prena louzou
Da zistruja da vloaz, dizamant,
Ar c'hwiled bihan.

AL LOAR-GANN

Ahanta sodenn,
Tapet out, hañ !
Ma welfes da benn
Euz ahalenn,
Ne vijes ket ken gobiuz bremañ.
Mond a rafes da guzad zoken.
Abaoc ma 'z eo en em gavet
War he hein ar « gosmonoted »

Al Loar-Gann
A ziskan.

Setu aze gwazed avad
Ha n'eo ket lêz ribot o gwad.
Staget int d'he diskolpa !
Beh dezi ! Beh dezi 'ta !

O ! bieh vraz,

Soñj e-peus pa oan bihannig c'hoaz
Nag a aon am-beze,
Pa vezen tennet euz va gwele
Gand ar Seur Anna,
Mestrez ar skol-loja,
El leh ma oen-me bet

Taolet abred,

Ha war zigarez m'am-beze manket,
Evid eun tammig pehed,

O ! nebeud a dra :

Komz el lehiou diyennet peurliesa,
Rag siwaz ! va geñou ne jome prennet
Nemed pa vezen kousket.
Tennet euz va gwele eta,
E-kreiz an deñvalijenn,
Ha laket e pinijenn,
Puchet war eur gador
Dirag ar prenest digor.
Ha kaer am-beze gouela,
Peb goulou mouget,
Ha va unan lezet,

Eur wech kondaonet.
Ouzit da zelled.
Eun daboulin
E va feultrin,
Na me a grene em hiviz-noz,
O hedal beza lonket,
Va daoulagad serret kloz,
Evid miroud gweled
Da 'fas ruz
O c'hoarzin a-uz
D'am anken.
Piou eo an azen
En-doa va spontet evel-se ?
« Diwall 'Naig, a lavare,
« Diwall diouz al Loar-Gann
« A zamm ar vugale vihan
« Evid o drebi,
« Pa zellont outi. »
Ha me a grede.
Ha me a guze
Pa zispake
Beb ar mare,
Al louzenn,
Euz he houmoulenn.
En deiz a hirio,
Heb beza fall,
Ma vije greet kemend-all
D'ar vugaligou presiuz
Emaom o sevel d'on tro,
Me ' vije kuriuz
Da weled ar rejimantad doktored
A gouezfe warnom
En eur youhal : Tud digalon,
Emaint ganeoh « tromatizet » !...
« Tromatizet » ! Eur ger nevez,
A vez bremañ implijet bemdez
Da zivenn kastiza.
« Tromatizet » !

Me n'em-eus ket tapet ar hleñved-se,
Ha koulskoude !...
Mad ! an neb a garo
A gano
Loar Maubeuge, pe hini Landerne,
A eskemmo pokou
Dindan he bannou.
Me n'em-eus ket bet ezomm anezi
Evid pokad d'am hini.
Med kaset em-eus va ano
D'ar Hap-Kennedy
Ha dalhet va zro
Da vond beteg enni,
Rag, daoust ma n'eo ket brao en em veñji,
Kontantoh me a varvo
Ma hellan ober eun deiz warni,
N'eo ket sin ar groaz eo !...
Doue ra bardono Seul Anna
A ree he labour, neketa !
Med te, Armstrong, da hedal ma 'n em gavin,
Ouz al Loar-Gann, foultr 'ta mein.

MESPER MESPAOL

War don Bannielou Lambaol.

Koll a reoh hoh amzer
O vond e miz here
Da Vespaol da glask mesper.
Ne vezint ket dare.

Etre Per ha Paol
Ez eus bet cholori
Defot beza abostol
Parrez ar brikoli.

Da bôtr an alhweziou
Paol a roas eur mestaol
Hag hen stlapas a Vespaol
Dibouez fofis e vragou.

Evid en em veñji,
Ar pezh n'eo ket brao,
Per 'zivennas darevi
Da vesper ar vro.

P'ho-pezo c'hoant mesper
Vijent ket glaz-kaol
Goulennit digand Sant Per,
N'it ket da Vespaol.

D'AN TOUSEGI MOD NEVEZ

Eun touseg heuguz euz va hontre
Troet e benn gand an Tele
Abaoe ma kleve lavared
Gand e oll gamaladed
E tenne eston da Velmondo,
Ouspenn, eveltafi, Yann-Baolig oa e ano,
Ya, Yann-Baolig ar Rouz,
Mab da Job ha da Soaz an Touz
« N'eus foull forz, a lavare,
Me a fell din evel egile
Ober sinema. »
Evid plijoud da Nana,
Eur hleskerig faro
A wele o lammad
Dizolo he 'feskennou ganti
E tro ar hanndi.

Klevet en-doa kaozeal
Diwar-benn ar Festival
Greet da zibab ar yaouankizou
A rafe ar gwella ardou.
« N'eus giz ebed ken, emezafi,
Evid ar gwiskamant;
Zoken en amzer a hirio,
C'hwi oar, e peb bro,
Ar re zivalaoa
A vez kavet ar braoa !
Eur chafis bennag am-eus neuze
Da zamma ar maout dizale. »

Hag eñ war hent ar hreisteiz
Da glask fred d'e ampartiz.
Er vodadeg pa erruas
Selaouit petra 'glevas :
« Darling ! Sexy ! Hello !
Bof ! Sexy ha sexy ato ».

Setu an nebeud komzou
A oa war an oll muzellou.
« Biskoaz kemend-all !
Daoust ha ne vijen ken e Bro-Hall ? »
Ha nag a dud a oa eno !
Eur bres warno
O froumal evel kelien
Endro d'ar renerien.

Er penn kenta, ar Vardot
Mouzet evel ato,
Ken berr he lostenn
Ma veze gwelet he daou-benn
Hag he zammig bragou,
Heb lavared gaou,
Strisoh eged eur mouchouer-fri !
Ha c'hoaz brao pa oa unan ganti !
Pelloc'h o fumi oa Sophia
Ha Claudia ha Tata
Dispak o bruched
Beteg bordig ar pehed !
« Feiz, a zoñje on touseg ennañ e-unan,
Tomm eo dre amañ, eüruzamant. »

War eur blasenn all oa Johnny,
Eul lunedou war e fri
Ken braz ha rodou
Karr an Ankou.
Gand Klotig François, « Cloclo » giz deo,
Echu gantañ e gresk pell zo,
Hag Adamo ingal o suna
« Pastilles Valda »
Muioh a vad 'rafe dezañ eur spurj holer
Pe eur holier kignen.
Gwechall va noun dije lavaret :
« Pa vezer raouliet, aliez 'vez preñved. »

Alanig Delon oa tapet nehet,
Ken aliez tro eo bet dimezet

Ma n'en-doa soñj ebed mui
Piou dre eno oa e hini !
Ar re all oa diêz da anaoud
Koulz oa divinoud.
Rag an darn-vuia anezo
Oa goloet gand o bleo.
A-benn ar fin, inouet o selled
Ha prest da binta gand ar zehed,
Yann-Baolig a lavaras
Evel an hini braz :
« Komprenet am-eus ahanoh ! »
Ar pezh n'eo ket fall dija, me lavar deoh,
Kompren an nesa
A zo eun dra gaer, neketa ?

Hag on kanfard d'an ostaleri,
« Chomit 'ta aze, emezañ, gand ho sexy,
Me 'zo 'vond da eva eur banne
D'ho yehed ha da va hini me. »
Med pa zonas eur ar joaz,
D'an touseg rouz eo yeas ar priz kenta
Evid ober sinema
En abeg ma oa en noaz !
Hag ar bloaz-mañ eñ eo
A gaso deom ar hiz endro
Da hedall fortuna
D'an dimezell Nana.
Med ni, diwallom, ma 'z om fur,
Da lezel tousegi gand ar stur.

Savet e goudor va zi kloz
War bordig ar mor e Rosko
Hag echuet da hanter viz here
Mil nao hant c'hwezeg ha tri-ugent.

EUN NEBEUD GERIOU DIEZ

Eun nebeud geriou implijet gand Naig Rozmor, n'int ket moarvad anavezet e peb leh :

bre : magie

breüz : magique

kandi : poull da ganna

kelernig : feu follet

loar charreaterez : al loar a-haoliad etre fin miz eost ha penn kenta miz gwengolo hag ouz skleur al loar-ze, eo e veze greet charreou diweza an eost, pa ne veze ket hir a-walh an deiz ken.

moana : ployer.

TAOLENN

Eur ger araog, gand Jakez Salaun	P.	1
--	----	---

SELAOU

En ano ar garantez	P.	6
Va fedenn	P.	7
Daouarn va zad	P.	8
Enkrez	P.	9
Da betra 'zervij ?	P.	10
Requiem	P.	11
Evid gouel va mamm, Doue d'he fardono	P.	12
Ar mesaer	P.	13
Pedenn houez	P.	14
Da va hendalher	P.	15
Kalanna ar Mabig Jezuz	P.	16
Va hi	P.	19
Truez	P.	20
Huanadenn	P.	21
War ar gliz	P.	22
Pinienn	P.	24
War hent Bethleem	P.	25
Nedeleg er Vereuri	P.	26
Piou eo ?	P.	29

LID

Sklêrijenn	P.	31
Nehamant	P.	32
Va haerra huñvre	P.	33
Pa dremen an askell-grohenn	P.	34
Alleluia	P.	35
Promesaou	P.	36
Gousperou	P.	37
Ma hellfen-me skriva	P.	38
Kregin	P.	39
Bale eured evid Doue ar mor	P.	40
Mari Vorgan	P.	41
Salokras	P.	42

Sabad	P.	43
Er wagenn	P.	44
Huñvre	P.	45
Diwar an uhel	P.	46
Rogasionou	P.	47
Briadelez 2000	P.	48
Eur mister joaiuz	P.	49
Kalander	P.	50
Lid	P.	52

TRID

Ar « plan Orsec » e Rosko	P.	54
Diwar goust ar petrol	P.	59
Al loar gann	P.	61
Mesper Mespaol	P.	64
D'an tousegi mod nevez	P.	65

Eun nebeud geriou nebeud anavezet	P.	69
---	----	----

Taolenn	P.	70
---------------	----	----

Lod euz ar barzonegou a zo eet d'ober al leor-mañ, a oa bet embannet dija, pe e « Brud Nevez » : Gousperou, Promesaou, Ma hellfen-me skriva; pe e « Bleun-Brug-Feiz-ha-Breiz » : Diwar goust ar petrol, Al loar-gann, Mesper Mespaol, D'an tousegi mod nevez.

**AN OLL DUD
A OAR BREZONEG
A RANK LENN :**

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

E Brud Nevez, e hellit lenn pennadou gand : Per-Jakez Helias, A. Keravel, Visant an Askol, Per-Mari Mevel, Charlez ar Gall, F. Broudig, Mari Kermareg, Donatien Laurent, Yann Bijer, K. Brisson, ha kalz tud all...

Koumanantit, hag evid se, kasit hoh ano hag hoh adres da :
Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz ar houmanant :

- *priz ordinal : 40 lur evid eur bloaz (10 niverenn)*
- *koumanant-skoazell : azaleg 50 lur*
- *evid ar studieren hag ar zoudarded : 30 lur*
- *hanter-briz evid al liseaned : 20 lur*
- *broiou estrañjour : 50 lur*

*

An oll chekennou-post a zo da veza laket war ano P.M. Mevel
C.C.P. 1499-55 Roazon.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da Vrud Nevez, 6,
ru Beaumarchais, e Brest (war ano « **Brud Nevez** »).

Lenn a rankit ive

**LAPOUS-DEN
PENN AR BED**

pez-c'hoari renket diwar saozneg **J.M. Syngé**
gand C'hoariva Brezoneg Penn-ar-Bed

—

Unan euz brudeta peziou ar skrivagner iwerzonad John
Millington Syngé, a zavas kement a reuz abalamour dezañ,
e Dulenn, e 1907, hag ema C'hoariva Brezoneg Penn-ar-
Bed (CDUB) o kinnig d'ar vrezonagerien an hañv-mañ.

*

* *

Al leor-mañ a hellit kaoud evid 10 lur + 2.40 lur a
vizou-kas, en eur skriva da : Brud Nevez, 6, ru
Beaumarchais, 29200 BREST. C.C.P. P.M. Mevel.
1499-55 Roazon.

Barzonegou a garantez eur vaouez hag a zispleg en eun doare gwirion-kenan « huanadennou he horv entanet », ha n'ankounac'ha ket eo ar garantez «eur gomunion souezuz / deuet d'or skoulma korv hag ene / beteg ar beure. » Barzonegou all, goapauz lod anezo, na pa vefe nemed diwar goust « an tousegi mod nevez »... Eur stumm da skriva hag a zo tre diouz doare ar brezoneg.

Biskoaz c'hoaz ne oa bet skrivet seurt barzonegou en or yez.

Al leor kenta embannet gand Brud Nevez.

Dans ce recueil, vous lirez en particulier des poèmes d'amour d'une facture et d'une inspiration inattendues en breton. Possédant à merveille la connaissance de sa langue, Naig Rozmor parvient à exprimer ses sentiments de manière très originale et dans une langue facilement accessible.

Jamais une femme n'avait, jusqu'à présent, rien écrit de tel en breton.

Le premier livre édité par Brud Nevez.